

Merourez oc'h gant Jezuz;  
 Ha d'eoc'h e ro pep gras;  
 Al bezit trugarezus,  
 Hon ezommou 'zo bras,  
 E-kreiz an denvalijenn,  
 O gwerelaouenn vrao,  
 Ra baro ho sklerijenn  
 A-us d'hor penn atao.

12

Pell 'zo c'houi 'zo bet choazet  
 Evit hor Rouanez;  
 E nep bro n'ho peus kavet  
 Teneroc'h karantez,  
 Tud fidel a vandennou  
 A deu d'ho kaout bep bloaz,  
 Ha war hent ho chapeliou  
 N'eus ket eur c'heotenn c'hlas

13

Klevet a ran ho pedenn,  
 Bugale Breiz-Izel;  
 Ya, rust eo ar wenodenn,  
 Ha teun eo ar brezel.  
 Met na gollit ket fizians :  
 Dorn Doue ar c'hrenva,  
 Ha lagad e Brovidans  
 'Zo warnoc'h o para.

*(Droits réservés)*

IMPRIMATUR:

Quimper, 7 Novembre 1945.

J. CADIOU, vic. gén.

PELERINED AR FOLGOAT

DISKAN

*Patronez dous ar Folgoad,  
 Hor Mamm hag hon Itron,  
 An dour en hon daoulagad  
 Ni ho ped a galon:  
 Harpit an Iliz santel,  
 Avel diroll a ra...  
 Tenn hag hir eo ar brezel!  
 Ar peoc'h, o Maria!*

1

Eus an Arvor, ar gourre,  
 Ni deu d'ho saludi;  
 Holl ez omp ho pugale,  
 Holl ho karomp, Mari,  
 Tud ar gourre, Arvoriz,  
 Diredet omp hirio  
 Da bedi 'vit an Iliz,  
 Da bedi 'vit hor bro,

2

Gwechall er vro-man 'veve  
 Eür paour berr a spered:  
 SALAUN AR FOLL ne ouie  
 Netra koulz lavaret.  
 Daou c'her «Ave Maria»,  
 Setu e holl bedenn;  
 N'ehane ket d'o c'hana  
 Diwar skourr e wezenn.



Pell amzer, kan a zavas  
 A-us d'ar wezenn deo;  
 Eun deiz ar vouez a davas,  
 Salaün ne oa mui beo:  
 E ene gant an Elez  
 'Oa aet d'ho lez, Itron,  
 Da gana ho madelez  
 Bepred e-tal ho tron

Ha lili 'oa diwanet  
 Ez-trumm war bez ar paour;  
 Hoc'h hano-c'houi garanet,  
 En deliou gwenn, en aour.  
 Al lili a ziwane  
 Er genou yen ha mut :  
 Ho floc'hig c'hoaz a gane  
 Hoc'h hano glan d'an dud.

'Vel eur mor en em ledas  
 Ar brud dre Vreiz a-bez,  
 Ha Breiziz a ziredas  
 Da bedi war ar bez.  
 Hag e-lec'h ar bod lili,  
 Evit ar grasou bet  
 O deus savet da Vari  
 Eun iliz kaer meurbet.

Mari. Mamm ar gristenien.  
 Ma karit an Iliz.  
 Hepdale deut d'he difenn  
 Diouz enebourien kriz.  
 Hirra ma c'heller gwelet,  
 Er mor' z eus tarziou gwenn.  
 Bagig Sant Per 'zo strinkel  
 Eus eur garreg d'eben.

Diwallit na lavarfe  
 An dud fall 'zo er bed :  
 «Gwechall e oa Mamm Doue  
 Dous hag aes da garet;  
 He diskouarn a oa tano,  
 Klevet a rac raktal;  
 Hirio ez eo pounner-gleo,  
 Outi eo ret krial.»

Nann, nann... Al lavit pelloc'h  
 Rak Mari, tud difeiz,  
 Morse ne deo bet tommoc'h  
 He c'halon en he c'hreiz:  
 Gwelet eo bet o lenva  
 War gern ar menezioù;  
 Bemdez emai o paea  
 Hon die dre he daelou.

Dirak ho skeudenn, Mari.  
 Ni 'ra eur goulenenn all:  
 Beilhit mat war hor bro-ni,  
 Breiz-Izel ha Bro-C'hall  
 Diwallit an eneoù  
 Diouz mevelien Satan,  
 Selaouit hor pedennou  
 Hag hon tennit a boan.

Bras eo bet hor pec'hejou,  
 Dister hor pinijenn;  
 Rak-se e dorn an Aotrou  
 E chom ar wialenn.  
 Gwall zouget omp d'ar pec'hed,  
 Hor mirit. Gwerc'hez vat,  
 Diouz an droug en deus trec'het  
 Jezuz o skuilh e wad.